

Brezel eur beleg "brancardier" e-pad ar brezel 14-18

Va 'livret' a lakae e tleen, ma teuje ar brezel, kemered* an treñ an devez kenta. D'ar zul, 2 a viz eost, da 4 eur diou ar mintin, e lavaran eta va overenn, hag a-benn an treñ 5 eur hanter, ez an d'ar gar. Tud a-vernioù a zo o houlen plas, evel don ; eun toullad beleien, o vond ivez d'ar brezel, a ra assemblez ganen al lodenn genta euz an hent. P'en em gavan er hazarn *Bedeau*, e Naoned, e lavarer din n'em-oa ket ezomm d'en em gaoud a-raog an trede devez. Koulz e vije bet va laosker er gêr, mez n'edo ket ar mare da glemm. D'ar meurzh vintin, e tistroan adarre, ha setu-me soudard, azaleg neuze : lakaet on da "vrancardier" en 11^{ved} "Corps". N'eo ket tenn al labour, e-pad an eiz devez ma chomom c'hoaz e Naoned : eur pennad bale bemdez, evid an em voaza, ha koñje goude-ze da bourmen, kement ha ma karom.

D'an 10 a viz eost, or "brassard" en-dro d'or breh, hag or zah war or hein, e kuitaom Naoned. Pounner e kavem ar zah, a hellit kredi, mez da zeg eur hanter, e kemerem an treñ e Ste Luce, evid mond ne ouzom ket da beleh. Tremen a reom dre Ancenis, Angers, Sablé. Er gêr-mañ, an dud a ra deom eun degemer euz ar re gaerra ; degas a reont deom bara hag amann, koñfitur, skotennou†, etc.... An dro a reom da Bariz, heb mond e-barz. E gar Meaux, an Aotrou 'n Eskob Marbeaux, eun den euz ar re gaerra, ha n'en-deus ket ehanet, abaoe ar brezel, da ober vad d'or zoudarded, a deu d'or haoud, hag a ro deom oll peb a vedalenn. Tostaad a ra an noz, ha koan a zo debret. Pa houlen digand ar zoudarded all ha plijoud a ra dezo e ve lavaret ar bedenn e komun, e respontont : « ya, diohtu ». An Aotrou Goarzin, mestr-skol e St Vaze Kemper, eun tammig kosoh egedon, he lavar a vouez uhel. Evelato, daou iñfirmier a oa drougkontant, evid doare, hag antronoz vintin ez eont da glemm oh ar serjant, abalamour m'o-deus ranket pedi en despet dezo ; mez koueza fall a ra an daou baotr kêz : ar serjant a zo beleg ivez !

Setu-ni e Reims. Daoust ha n'om ket eet c'hoaz pell a-walh ? Nann, rag ar medisin-chef a reseo eul lizer hag a ro urz da gendelher ar veaj. Anad eo koulskoude e tostaom oh an enebourien : soudardd a lakeer da zond ganeom en treñ hag a zo prest o fuzuilou da denna war an aeroplanou prusian, ma'h en em ziskouezont. A-barz ar fin e tiskennom e Somme-Py, departamant ar Marn, fêzet oll gand or beaj a 27 eurvez. Or mistri a ya diohtu da glask lojeiz deom er bourk, ha kavoud a reont eun nebeud kolo, en eur hrañch hanter-zigor.

Antronoz emañ war-zav kerkent ha 5 eur, hag e hellan komunia. Da 6 eur, eh en em lakeom en hent, hag e reom seiz leo diohtu, gand eun domnder spontuz, hag or zah war or hein, evel just. Dre ma'z eom, n'ez eus nemed sao ha diskenn ; an darn-vuia a zo dare‡ gand ar zehed, hag o-deus beh o chom en o zav. Da 10 eur, e chomom eur pennad da ehana, ha goude-ze yao adarre. Va zreid a zo kignet hag a ra din eur boan spontuz. Da ziv eur evelato emañ e

* kemered an treñ: levezon ar galleg. mond gand..

† skotennou : ?

‡ dare gand ar zehed : sehed braz o-deus. Iskiz eo an implij-se euz ar ger "dare".

Falaise, e penn or beaj. Kenta 'ran, goude beza taolet va zah, eo tenna va boutou, ha mond da walhi va zreid kêz war bord eur ster vihan a dremen e-kichenn ar bourk. Dre chañs, e chomom daou zevez el leh-se, hag overenna a hellan ivez. Nerz am-mezo evel-se da vond adarre en hent.

D'ar 14, mintin mad, e kerzom war-zu Autruch : 5 leo or-beus da ober, hag an heol a zo ken tomm ha biskoaz. Er bourkig-mañ, an dud a zo kristenien vad, evid doare, mez re 'zo a fell dezo gounid diwar or houst : c'hoant o-deus da werza deom 5 real al litrad gwin badezet. Dih ar pardaez, o veza m'ema derhent Hanter-Eost, an darn-vuia euz ar zoudarded a houlen beza kovesaet. Goude-ze ez eus chapeled. An iliz a zo leun-barr gand ar zoudarded, ha kalz a red an daelou euz o daoulagad, pa glevont ar homzou kaer a lavar dezo an Aotrou Girousse, omounier militer.

Da zeiz ar gouel, an overenn a gomañs kerkent ha 3 eur hanter. Bez' ez om 25 beleg, hag oll e fell deom overenna, a hellit kredi. An overenn-bred a zo kanet er-mêz : an iliz a vije bet re vihan. Da 3 eur, gousperou, benediktion, ha sarmon. Or hamaladed a oa eun dudi kleved anezo o kana.

Siwaz ! ne hellom ket chom da beurechui eur gouel komañset ken brao. Urz a deu deom d'en em lakaad diohtu en hent war-zu Le Vivier, 30 kilometr pelloh. Glao braz a gomañs koueza, hag eun avel yen-sklas a zonn on izili, daoust ma rankom bale buan. N'en em gavom nemed da ziv eur dioh ar mintin, ha n'on-deus ket koaniet c'hoaz. Daleet om bet en hent, ne ouzon ket ped gwech, ken teñval eo an noz, ha divenn a zo da elumi an disterra letern. Setu aze eun nozvez hag a jomo ar zoñj anezi en or spered e-pad eur pennad mad.

Pa zivunan, dioh ar mintin, e klaskan lavared an overenn, mez n'eo ket posubl. En hent adarre. Skuiz om dioh ar pardaez, pa deu mare an ehan. Prest eo ar zoubenn : emaom o vond da gomañs ganti, pa deu urz deom d'he laosker, ha da vond kuit buan-buan, beteg Le Fresnoy, tostig da gêr Sedan. Ugent kilometr all or-beus da ober, dre hentchou lahuz. Unneg eur eo, p'en em gavom, ha ne hellom en em astenn war eun tamm foenn, nemed da eun eur dioh ar mintin : greet or-beus eun devez mad.

Antronoz, ne hellom ket overenna adarre : n'eus beleg ebed er barrez-mañ. Eur wech eet er-mêz euz ar bourk, e welom dirag on daoulagad, evel en eun daolenn gaer, eul lodenn vraz euz ar vro : Bazeilles, Balan, koad Marfée, hg a-gleiz d'an hent-braz a ya beteg Sedan, ar maner ma sinas ennañ Napoleon II eur paper, evid en em renta gand e arme. Pa weler penaoz eo kelhet kêr Sedan gand torgennou uhel, ne gompren ket e ve eet ar Frañsizion d'en em lakaad e-barz : re êz 'oa d'ar Brusianed paka anezo evel en eur zah.

Eun daou zevez war-lerh, em-eus gellet overenna. D'an 20 ez eom da Remilly, teir leo pelloh. En deiz-se, e teu deom ar helou euz maro on Tad santel ar Pab PI X. Gweloud a reom ivez, evid ar wech kenta, eun aeroplan prusian. Dond a ra a-zioh or penn : ar zoudarded a glask e baka gand o fuzillou, mez gelloud a ra tehed...

21 a viz Eost : - Kuitaad a reom Remilly, ha dre Zedan, Villers-Cernay, ha Francheval, ez eom beteg La Chapelle, 15 kilometr pelloh. Eno e lojom en eur hraou-kezeg, ha da 5 eur dioh ar mintin, antronoz, e kendalhom or beaj. Da 8

eur e treuzom ar roudenn a zisparti ar Frañs diouh ar Beljik, ha pa zaludom ar Frañs a-raog he huitaad, e santom or halon o lammad en or hreiz...

Ar Beljik a zo eur vro gaer-meurbed. En-dro deom, ez eus koajou braz, ha dirazom, eun hent eün ha plên, a gas ahanom, a-benn 6 kilometr, beteg eur gêrig vrao anvet Bouillon. Pa en em gavom gand an tiez kenta, kalz soudarded a guita o reñk evid mond da brena butun, alumetez, ha traou all, a zo oll eun tamm gwelloh-marhad eged e Frañs. mez ne jomom ket a-zav : beteg Noire-Fontaine, eul leo hanter pe ziou pelloh e tleom mond. Goude beza debret ol lein en eur park, ez eom da ober eun dro d'an iliz, a zo eun dudi he gweled, hag a ziskouez emaom en eur vro a feiz virvidig. An dud a zo ivez laouen-braz ouzom.

Emaom an 22 a viz Eost. Da 9 eur diouh ar mintin, or-beus klevet evid ar wech kenta mouez trubuilluz ar hanol : komañset eo an emgann braz. Eur pennadig goude-ze, e tremen dirazom eur vandenn dragoned bleset* : ar wech kenta eo evidom da weled ar gwad o reded. War-dro 4 eur hanter, e teu urz deom da vond ivez war an dachenn. Kerzed a reom adarre e-pad eun eur hanter, war-zu Palisseul. Laouen om oll. Mez setu o tond dirazom eur paour-kêz artilleur, kollet gantañ ivez e gepi, divouton e jiletenn hag e roched, gwenn-kann e vizaj, dispourbellet e zaoulagad, ha beh dezañ o chom war e loen†. Biken ne gollin ar zoñj anezañ. Eur ger a lavaran dezañ, pa dremen em hichenn, hag eñ a respont : « Aze emaint, erru war ol lerh ». Ar Brusianed a fell dezañ da lavared. Ne glaskin ket nah e taoulamm neuze va halon em hreiz ; ar wech kenta eo deom da veza ken tost d'ar brezel. Goude ma chomfen kant vloaz war an douar, ne zizoñjin morse an eur-ze euz va buhez. Ne fallgalonan ket evelato : ober a ran eun akt a gontrision, ha ken dispont ha tra ez an gand va hent. Eun nebeud chaseourien a welom bremañ o tond, dare da goueza gand ar skuizder hag anad ar spont en o daoulagad : tehed a reont a-raog ar Brusianed. Hini ahanom ne gred goulenn diganto nag euz a beleh e teuont, na da beleh ez eont, gand aon da greski c'hoaz an enkreuz a zo en or halon. En em gavet om e-kichennig gar Palisseul. Eur zeksion iñfirmerien a gaser da zikour ar zoudarded bleset da zevel en treñ, mez ne deuont ket a-benn da ober o labour. Etretant, ni a jom war an hent-braz, hag a ya oh ar hleuz da ziskuiza. Gweled a reom neuze o tremen dirazom, hag o tehed a-raog an enebourien eur "horps d'armée" a-bez, ar 35^{ved}, an 2^{ved} chaseourien, ar 116^{ved}, an 118^{ved}, hag eul lodenn euz an 19^{ved}. Al lodenn all a oa bet treh war ar Brusianed diouh ar mintin, gand o baionetezou, e bourk Messin, hag a zalhe penn dezo c'hoaz. N'o-deus ranket plega nemed d'ar zul vintin, da 10 eur. Eno eo kouezet an aotrou Ernest Kerjean, hag al lodenn vrasa euz ofiserien an 19^{ved}. Evid dond kuit euz Messin, ar zoudarded diweza a zo bet red dezo bale war o farlochau war gorv o hamaraded. Ne zoñj ket din evelato e ve bet braz en deiz-se gounid ar Brusianed, peogwir n'int ket deuet buannoh war or zeuliou.

* bleset : gloazet.

† loen : marh.

Diohtu goude hanternoz, d'ar zul vintin 23, e kuitaom Palisseul, hag e reom ar memez hent evid distrei war or hiz. Teir roudennad gweturiou, skoaz-oh-skoaz, a ya asamblez war an hent-braz, hag en o zouez eh en em zil zoken meur a zoudard war droad ha war loen. Evel-se, ez eo nav eur dioh ar mintin p'en em gavom e Noire-Fontaine. Buan e tommom eur banne kafe war bord an hent, hag eun eur diwezatoh e kerzom adarre, goude beza ententet oh soudarded blezet ar 17^{ved} "corps". Distrei a reom da gêr Bouillon. E-pad an noz, soudarded ar "génie", evid klask mired oh ar Brusianed, ar muia posubl, da vond war a-raog, o-deus toullet trañcheou a-dreuz ar parkeier, pilet gwez, ha diskaret pontchou. P'eo deuet an deiz, e toullont trañcheou all evid kuzad ar hanoliou hag ar zoudarded war droad. Ni, or-beus mil boan o vond beteg Bouillon, ha koulskoude n'or-beus ket amzer da goll : ar Brusianed a zo en em gavet war ol lerh e Noire-Fontaine. Kezeg an artilleurien a zo ken fêz ma kouezont pa zoñjer an nebeuta, hag ouspenn ez eus o stroba anezo bandennadou tud, deuet euz Messin ha Palisseul, hag a zoug war o hein ar pez o-deus a dalvoudusa. Ar merhed o-deus war o divreh o bugaligou bihanna, a ro an dorn d'ar re hell bale. O ! pegen truezuz eo an dra-ze da weled !

Setu-ni adarre e Bouillon, o tehed a-raog ar Brusianed. Eur pennad e chomom e-kichenn ar gar. Eur harr-nij prusian a en em ziskouez a-zioh or penn, deuet da weled petra 'raim, hag o veza soñjet emaom o vond pelloh, ez a war an a-dreñv da gas ar helou. Ar Boched a deu er-mêz euz o zrañcheou, mez kerkent or hanol a zraill anezo a-vandennou, hag ar rest a ya buan-buan deg kilometr war o hiz.

E-kichenn Bouillon, war eun dorgennig, e welom ar jeneral Eydoux, hag a ali ahanom da vale buan. War-dro 9 eur dioh ar mintin e tremenom adarre ar roudenn disparti etre ar Frañs hag ar Beljik, ha da 11 eur emaom e Givonne, skuiz-maro gand an hent. Soubenn ha kafe a hellom da ober, evid ar wech kenta abaoe daou zvez. Mez a-veh eo debret on tammig pred, ma rankom eur wech all distrei war-zu Bouillon. N'eo ket red deom evelato mond beteg penn : a-zav e chomom en eun tiegez da dremen an noz.

Mez da 2 eur dioh ar mintin (d'al lun, 24 a viz Eost), e teuer d'on divuna a-daol, hag e rankom mond war or hiz dre Sedan, Frenoy, ha Chebéry, beteg Omicourt. Dre chañs, e hellom tremen eno ar rest euz an deiz, hag an noz war-lerh. Ezomm a-walh or-beus da ziskuiza : evidon-me, en-deus gwadet va fri teir pe beder gwech en devez a-raog, hag a zo fêz.

D'ar meurzh, 25, a-greiz m'emaom en overenn, e teu deom ar helou e rankom kuitaad Omicourt, ha mond beteg Malmy. War an hentchou ne weler nemed Beljed ha Frañsizien, dreist-oll tud koz, merhed ha bugale, o tehed a-raog an armeou. E Malmy, ez eus milierou a zoudarded. An XI^{ved} "Corps" en-deus roet e blas d'ar ...^{ved} euz ar Hreistez. Hemañ ne zeblant ket beza kalz e poan d'en em lakaad e riskl, rag abalamour dezañ eo bet or zoudarded-ni ken draillet er Beljik. Meur a wech em-eus gwelet va hamaraded o vervi gand an imor a-eneb dezo. « An dud-se, a lavarent, eo o-deus ar muia deputed ha ministred d'o divenn, haga zo bremañ da genta o tehed a-raog ar Brusianed ! » Aliez, pa dremenent dirazom, e save kri warno.

E-pad an deiz, ar hanoliou ne ehanont ket da grozal. Da 1 eur hanter, an diou ambulañs N° 3 ha 4, a zo eveldom-ni e Malmy, a deu kelou dezo da vond da Zedan. Petra 'zo a-nevez 'ta , eno ? Tud, tehet euz ar gêr-ze, a deu d'hel lavared deom. Eur vandenn soudarded prusian war loen, deuet d'ar haloup e Sedan, a gredas ne jome da enebi outo nemed eur zoudard bennag, hag a yeas diohtu d'her rei da houzoud d'eun arme a deue war-lerh. Houmañ a gerzas beteg kreizkêr, heb douetañs ebed. Mez ar Frañsizien o-doa 600 kanol hag eur "horps d'armée" kuzet er hoajou a zo tro-war-dro a-zioh kêr, ha kerkent or hanoliou a gomañsas da denna war ar Boched, hag a reas eun draill spontuz anezo. Evel-se or-beus bet on digoll euz an 2 a viz Gwengolo 1870.

D'ar 26, da 11 eur diou ar mintin, e-pad m'emaom gand or pred, e roer urz deom da vond diohtu war or hiz, war-zu Louverny, 15 kilometr pelloh. En em gavet er bourkig bihan-mañ, a zo ennañ eun iliz nevez koantig-kenañ, e rankom pignad war eun dorgenn a zo a-zioh, hag ar zao a zo ken tenn, ma'z eo red deom sikour ar hezeg da dreina o hirri. Antronoz, em-eus ar joa vraz da helloud overenna. A-raog kreisteiz, e kuitaom war-zu Chemery, hag e valeom beteg 5 eur. Er bourk-mañ ez eus eun toullad prizonerien brusian, hag a zebtant krena gand ar spont. Aon o-deus, evid doare, da veza fuzuillet. En o zouez ez eus eul letanant-kolonel. Euz Chemery, ez on kaset da Vaisoncelle. Bandennadou soudarded bleset a zo eno, e kement leh ma kavont plas, en tiez, er zolierou, er grañchou, ha diohtu eh en em lakaan da entent outo. Unan a zo bleset en eiz leh ; eun all en-deus en e vouzellou eur mellad toull hag a vez gellet lakaad ennañ an dorn serret ; eun trede a zo e benn hanter-flastret. An omonier a goves hag a ro ar zakramañchou diweza ar buanna ma hell. Da zeg eur, e tistroan adarre da Chemery, gand eur paour-kêz den hag a dle beza operet. E-pad m'ema etre douarn ar vedisined, e klaskan eun tamm da zebri, mez soudarded all bleset a deu c'hoaz, ha rei a ran an dorn d'o has beteg an iliz, a zo lakaet enni an ambulañs. Evel-se, o vond euz an eil d'egile, hag o rei sikour gwella m'eo posubl, e tremen an noz.

Da houlou-deiz ez eom a-nevez da Vaisoncelle, da weled ha mond a hellim war an dachenn a vrezel da zastum ar zoudarded kouezet. Eur vandenn soudarded all, "brancardier" eveldon, a zo roet koñje deom da vond war dorgenn Bulson, el leh m'ema an emgann, ha gweled a reom neuze dirag on daoulagad eun daolenn gaer ha spontuz asamblez. War lein an dorgenn ema reñket ar hanoliou, hag eun tammig pelloh an "infanterie", gand o "mitrailleuses". War-dro 8 eur, ouspenn kant kanol a gomañs tenna asamblez : biskoaz n'em-eus klevet eun trouz ken spontuz ! Mez n'eo ket e-kichenn ar hanoliou ema ol labour : treuzi a rankom dirazo, e-pad ma sut an tennou a-zioh or penn, evid mond beteg bourk Bulson memez. Eno ez eus soudarded bleset, hag a zo mall o has kuit. Eur habiten ne fell ket dezañ ol laosker da dremen, mez kaoud a reom eun tammig pelloh eur homandant haga ro koñje deom.

P'en em gavom e Bulson e welom soudarded bleset a bep tu, en tiez, er grañchou, en iliz, ha diohtu e komañsom da zamma anezo war or gweturiou. N'ez eus nemed eur Prusian en o zouez. Mal eo deom mond kuit ; or

gweturiou, en eur dremen war gorre an dorgenn, o-deus, a zoñj din, roet da houzoud d'on enebourien e peleh ema ar zoudarded, rag setu ma komañs o zennou kanol koueza warnom. Em hichenn, tost d'an iliz, e strak eur mellad obuz, hag a ra gwall houli en e benn d'eur zoudard euz ar "génie". Tehed a reom, mez ne hellom ket bale buan. Lod euz or zoudarded bleset a rank bale war o zroad, hag o-deus poan oh en em ruza. Eun "artilleur", tizet en e benn, a zo ken fêz, ma klaskan eur plas dezañ er wetur. E Chemery e tiskennom or zoudarded keiz, evid o diskuiza eun tammig, mez n'eus plas e neb leh, ha red eo mond beteg Vendresse. Eno, dre hras Doue, e hellom o lakaad en treñ.

Va-unan, n'em-eus nerz ebed da vond pelloh. Ouspenn eun eur eo, ha naon braz em-eus, mez brasoh c'hoaz eo va skuizder, hag en em astenn a ran war al leton, evid klask ober eur pennad kousked. C'hoant em-ije bet koulskoude da zistrei da Vulson, e leh ma'z eus chomet kement a zoudarded vleset war-dro ar bourk, ha war dachenn an emgann. Soñj a zalhin atao euz ar goulenn a reas diganin unan anezo, en eur zevel war va zu e zaouarn kroaziet : « O ! c'hwi a zo beleg, dond a reoh bremaig en-dro d'am herhad, neketa ? ». Siwaz, n'eo ket bet posubl din distrei d'e zastum. Da deir eur ez eom a-nevez war a-raog, beteg Malmy. Mez a-veh degouezet er bourk-mañ, e rankom buan dond war or hiz : ar ...^{ved} "Corps" en-deus adarre kemeret aon, ha troet kein. Distro da Vendresse, e hellom a-barz ar fin debri eun dra bennag, mez heb ober tan : tregont eur a oa abaoe n'or-boa bet tamm. War-dro nav eur, ez eom da gousked en eur hrañch : daou zevez ha diou nozvez a oa, n'or-boa ket klozet on daoulagad.

Mez da hanternoz, emaom adrre war-zao : da Ecordal or-beus da vond, 6 leo pelloh. P'en em gavom dioh ar mintin, e komañsom da aoza eun tamm boued tomm : soubenn ha rata a lakeom war an tan : mez a-raog zoken ma'z eo poaz a-walh al legumach, e teu kelou eur wech muioh da vond adarre en hent. D'ar haloup e tebrom koulskoude or pred, evel m'ema, ha c'hoaz en eur ranna gand eur vandenn Zouaved ha "Tirailleurs" dianket. A-veh ez om reñket war an hent, da hedal an oll gweturiou da lohad, ma klevom eun tenn fuzuill bennag, ha kerkent eun ofiser hag eur zoudard a deu, ar buanna ma hell dond o hezeg, da grial deom : « Aux armes ! » Ar zoudarded a lamm war o fuzuillou, mez n'o-deus ket ezomm da ober implij anezo : n'oa nemed eur vandenn Uhlaned, pe soudarded prusian war loen, deuet e patrouill, hag a yeas diohtu war o hiz. Treuzi a reom Attigny heb chom da ehana. Tud kêr a zo war hed euz ar Brusianed, hag a zo prest da freuza ar pont a zo war an Aisne, evid mired outo da dremen. Tost da hanternoz eo, p'en em gavom e St Vaubourg. Evel lojeiz, n'or-beus nemed eur hraou-kezeg, ha c'hoaz n'or-beus tamm kolo ebed da lakaad dindanom war ar mên. Mez ken skuiz om, ma teu deom diohtu ar housked er memez tra. Diuh ar mintin e klevan an overenn, heb gelloud komunia.

Da 7 eur hanter, e tiblasom evid mond war-zu Pauvres. An amzer a zo tomm-kenañ. Dre ma'z eom, e klevom ar hanol o krozal a-ziabell. War an hentchou, e kavom bandennadou loened, ha deñved dreist-oll, o tehed a-raog ar Brusianed.

Ni on-unan a rank kendelher da redeg en o raog. Dih ar pardaez, pa zoñj deom e hellim kaoud eun tamm ehan, e teu kelou adarre da vond pelloh, beteg Juniville. Evid doare, ar Brusianed a zo deuet war or roudou da Attigny. Lakaad a reom peder eurvez da ober eiz kilometr, kement a dud, a girri, hag a draou all a zo o karga an hentchou.

Antronoz, d'an 31 a viz Eost, e valeom adarre kerkent ha 5 eur, ha dre goajou an Ardennes en taol-mañ. Buannoh c'hoaz e tuom da skuiza, a hellit kredi. Fêz om, a-benn an noz, ha koulskoude ne hellom ket kousked, ken fresk eo deuet an amzer da veza. D'ar meurz, kenta a viz Gwengolo, e kendalhom or beaj war-zu Soulet, er Marne, mez a-veh lohet, e teu urz deom da zistrel war or hiz. Eun domnder spontuz a zo adarre. Dre chais, e kavom bier da brena, hag eur vaouez vad a deu da ginnig frouez deom.

D'an 2 e tremenom dre B/Prosnes, Sept-Saulx ; d'an 3, dre Vraux, Juvigny, ha diuh an noz, pa gave deom 'oa deuet ar mare da ehana, e rankom mond beteg Pocany. War bord an hent, e welom eur maner, hag a zo ennañ eun toullad soudarded war droad, foug enno o kaoud eul lojeiz mad. Ken dizoursi int, ma reont tan evid aoza o fred ; med siwaz, antronoz tennou kanol prusian a gouez warno, hg a laz an darn-vrasa euz ar vandenn.

D'ar gwener, 4, e pakom Sudron, ha dre ma'z eom, e klevom frêz ar hanol. Diskenn a reom eta beteg Sommesous, e departamant Aube. D'ar zadorn, e tremenom dre V/Mailly, Villers-Herbisse ; d'ar zul, emgom adarre er Marne, e Gourganson. Da deir eur, or-beus eun tammig amzer, hag ez eom d'an iliz da bedi ha da gana kantikou. Eno e teuas deom ano ar Pab nevez, Benead XV. Dond a reas deom ivez ar helou e tleem hiviziken mond war a-raog, e leh dond war or hiz, evel ma reem beteg neuze. Or halonou a drid gand ar joa, hag on oll boaniou a zo ankounac'haet en eun taol. Emgann a zo bet e Champaubert, ha kalz soudarded bleset a zo, mez ar Frañsizion a gomañs gounid ! Bennoz da Zoue !

En dro-mañ, a-raog lakaad war ar Hannad eur pennad all euz skrid an Aotrou Morvan, evid konta deoh e vuhez er brezel, em-eus arj oa da rei deoh da anaoud ez eo bet lakaet "à l'ordre du jour", hag en-deus resevet ar groaz a vrezel. Setu ema ar meuleudi kaer greet anezañ gand e golonel, d'an 10 a viz Here :

"An Aotrou J.M. Morvan, abaoe m'eo deuet da veza omounier an 2^{ved} "chasseurs", n'en-deus ket ehanet da ziskouez eun nerz kalon hag eur gourach dreist peb meuleudi. Prest atao da vond war a-raog, ha d'en em lakaad el leh ma'z eus muia riskl, evid sikour ar zoudarded vleset ha rei o zakramañchou d'ar re a zo war-hed mervel. D'ar 26 a viz Gwengolo 1915, en-deus sikouret savetei eun toullad soudarded vleset, en despet d'an tennou kanol a goueze puill warno, ha bleset eo bet e-unan eun tammig en deiz-se.

Deuet eo eta deom ar helou e komañs gounid ar Frañsizion. Or zoudarded a gendalh da zailla gand imor war ar Brusianed. Eun "depech" kaset ganto dre *télographie sans fil* a zo tizet gand on ofiserien hg a ro dezo da anaoud e houlenmont sikour buan-buan, pe e rankint mond kuit diwar douar Frañs. Ar jeneral Pau a houlen sikour ivez : c'hoant a zo da beurhounid ar viktor. Or hanoliou a dle tenna en deiz war-lerh azaleg nav eur beteg unneg eur, ha taoler

28.000 bouled. An noz memez a zo sklêrijennet, kement e c'hoariont a bep tu deom.

Da 6 eur diouh ar mintin, d'ar 7a viz Gwengolo, eh en em lakeom en hent war-zu La Fère, mez eun toullad euz va hamaraded ha me a zo kaset beteg La Mornée. Eun omounier a zo asamblez ganeom. Biskoaz, abaoe penn kenta ar brezel, n'em-oa klevet ar hanoliou o krozal kement. War-dro kreisteiz e hellan debri eun tamm bara, hag eun nebeud koñserv. Da ziv eur hanter, emaoom distro e La Fère, mez kerkent e rankom bale war-zu Connantray, gand an oll gweturiou ha traou all degaset ganeom da zastum ar zoudarded vleset. E Connantray e kavom eun toullad mad, hag a zo dare gand ar sehed. Gweled a ran an aotrou Boëtté, kure Sant-Varzin Brest, omounier gand an 19^{ved} : a-veh ma hell c'hoaz chom en e zav. E rejimant a zo bet gwall gempennet en deiz a-raog. Koves a ran eur pemzeg bennag euz ar zoudarded vleset, ha goude-ze ez an da Oeuivy. En eur hravaz e tougan eur zoudard kêz genidig euz ar Finister. P'en em gavom a-benn an noz, ez on ken skuiz ma teuan da zempla. Mez gand eur banne dour roet din gand unan euz va hamaladed e tivorfilan buan. Da goan e hellom kaoud eur zoubenn domm, ha gand an dra-ze kouskom c'hwek e-kreiz eur park, da nav eur.

Gouel ar Werhez, d'an 8 a viz Gwengolo. - Da deir eur diouh ar mintin ez om divunet gand an tennou kanol. Buan-buan e rankom samma or zah, ha mond war or hiz. Kleved a reom an tennou fuzuill eur hilometr bennag war ol lerh. Treuzi a reom Gourganson, Salon, ha ne jomom a-zav nemed diouh an noz, e Champfleury (Aube).

Mez perag e rankas ar Frañsizien dond war o hiz ? Setu amañ : Pa deuas an noz, ar Brusianed, o-doa ranket kila e-pad an deiz, a dostaas beteg on trañcheou, ha pa houlennas diganto or zoudared a oa e gward : « Qui vive ? », ar re-mañ a respontas : « France », hag e oent laosket da vond e-biou. Goude beza lazet or zoudarded e gward, setu-i en eul lamm war ol linenn genta ha sailla warnom gand o baioteneziou. Or zoudarded keiz, strafuillet oll e-kreiz an deñvalijenn, ne oa ket posubl dezo en em zivenn. Kalz a lazas or hamaraded, o soñjal e skoent war ar Brusianed. Evel-se e chomas kalz anezo war an dachenn, hag ar re a oa bet bleset e oe peurhreet outo gand o enebourien griz. Eno e kouezas an aotrou Deschard, bet gwechall va letanant.

D'an 9 a viz Gwengolo. - Da zeg eur hanter, e kuitaom Champfleury hag ez eom war-zu Charny, en eur ober eun dro hir-kenañ. En em gavoud a reom evelato a-benn an noz, heb droug ebed.

Antronoz e hellan overenna, hag aotrou person Planey a bed ahanon d'am dijuni ; mez n'en-deus mui eun tamm bara... ha me eo a ro dezañ va hini. Evel-se n'ez eus hini ahanom a dle d'egile. Abred e teu deom ar helou da vond adarre war a-raog, hag êz eo deoh kompren pegement e trid or halonou.

Distro da Champfleury e klevan konta kalz skweriou hag a ziskouez, eur wech muioh, pegen kaloneg eo or zoudarded, ha pegen kriz ar Brusianed. Setu amañ da genta eun taol hardisegez greet gand eur brigadier euz an eilved "chasseurs". E loen o veza bet lazet dindanañ, eh en em laka diohtu e-touez ar zoudarded war droad, ha kerkent e wel dirazañ eur pezh kavalier prusian. Biza a

ra dezañ, ha raktal ema ar paotr d'an douar. Ar brigadier a haloup war-zu al loen, hag a grog er vrid : eur pennad ez eo treinet gantañ, mez heb dale e hell pignad war e gein, ha yao en hent beteg e rejimant.

An istor-mañ a zo kaerroh, hag a ro da gompren pegement a vad a dle da ober ar veleien hag ar gloareged e-touz ar zoudarded. Eur habiten a grene a-raog lakaad e gompagnunez da zailla war eur gêriadenn a oa dirazo, ha n'oa ket a leh da veza souezet : meur a gompagnunez all, en deveziou a-raog, a oa bet hanter-ziskaret, o klask kaoud ar gounid er memez leh war ar Brusianed. Mez e-touez e zoudarded ez oa tri gloareg euz eskopti Gwened, hag a oa dispont-kaer : en em lakaad a reont e penn o hamaladed, hag ar re-mañ a gerz raktal war o lerh. A-veh lohet, unan euz ar gloareged, serjant-major, a bak eun tenn, hag a gouez a-stok-korv. E zaou vignon a fell dezo e zikour da zevel, hag entent outañ, mez eñ a lavar dezo : « Nann, nann, ho tever eo bale, it 'ta, ha bevet ar Frañs ! » D'ar mare-ze memez, eun tenn all a lak an eil kloareg, a oa serjant, hag a astenn anezañ e-kichenn e gamalad. An trede, kaporal, a gerz a-raog er memez tra, hag en-deus ar blijadur da vond beteg penn heb kaoud droug ebed.

Gwelit bremañ krizder ar Brusianed. Ne ouzon ket ped istor a anavezan, mez ne gontin nemed houmañ : eur vamm gêz a hirvoude, abalamour ma oa bet devet he zi ; mez e leh tenerraad kalon heh enebourien ouez, e lakeas anezo da vervi muioh-mui gand ar gounnar. He daou grouadur bihan a oe diframmet diganti, ha dirag he daoulagad, taolet e-kreiz an tan. Ar vamm gêz a vennas koll he fenn.

D'an 11 a viz Gwengolo, mintin-mad, e klevom gand joa ema ar Brusianed o vond war o hiz evid mad.